


KANTIK D'AN ITRON-VARIA-C'HRAS

Parrez Pluguën



Diskan.

Ni ho salud, o leun a c'hras,
Ar zantela zo bet biskoas :
Ni ho salud, gant levenez,
O Guere'hez, leun a vadelez.
Ave Maria,
Gratiâ plena.



1.

Patronez dous e peb amzer,
Mam truezuz en hor c'henver,
Varn'omp bemdez, euz an envou,
C'hui a skuil eur mor a c'hrasou.

2.

Nag a vech o peuz c'hui miret
Ouzomp-ni da veza trec'het
Gant an diaoul, pa zeu d'hon tenti !...
Trugarez deoc'h, Guere'hez Vari !

3.

Nag a vech, dre ho pedennou,
En deuz Doue var hor meziou
Digasset glaô hag amzer gaer,
Ha skuillet madou var bep ker !

4.

Ni dreist-oll, tud a Bluguën,
D'ho chapel gaer a ia laouen ;
Rag eno vezomp selaouet,
Ha nikun na vez dilezet.

5.

Diouallit bepred ar bugel,
Zo moredet en he gavel,
Ha grit ma vo, eun deiz, savet
Evel ho mab e Nazareth.

6.

Ni hon euz, dre ho madelez,
Skoliou kristen en hor parrez ;
Dalc'homp dez'ho, kerent kristen,
Ha bezomp fidel d'ho zouten.

7.

Diouallit mad, e peb amzer,
An dud iaouank, o Mam dener,
Ha d'ar zoudardet en arme,
Kendalc'hit bepred eur feiz kre.

8.

D'ar priedou roit karantez,
Lakit urz vad en ho ziez,
Grit ma savint ho bugale
E gras hag e doujans Doue.

9.

D'an den koz goulennit daelou
Da vouëla c'hoaz he bec'hejou ;
Ha grit na vezo ket galvet
Dirak Doue, en he bec'het.

10.

Diouallit an Iliz santel,
Diouallit ive Breiz-Izel ;
Douallit hor bro gaër a Frans,
O Guerc'hez dous, hon esperans !

11.

Dre anaoudegez, var ho penn,
Ni n'euz lakeat eur gurunen :
Grit ma vimp ive kurunet,
Eun deiz, e palez an Dreindet.

12.

Eno, o Guerc'hez, leun a c'hras,
Gant an elez ni gano c'hoas :
Gloar, meuleudi da Vam Doue,
Epad an oll eternite !

IMPRIMATUR :

Quimper, le 21 Septembre 1898,

E. FLEITER, VIC. GÉN.

Pardon bras Itron-Varia-C'hras a vez great, en he
chapel, e parrez Pluguën, d'an 8 a viz Guengolo.

Kemper, moulet e ti de Kerangal.

